

miz Meurzh 90 - Nnn 102 - 15 lur

bremañ



**MANIFESTADEG
17 a viz Meurzh**

Breizh adunanet !

Postoù kelenn Brezhoneg

**E ROAZHON
evit**

**Skinwel
ha Radio
e Brezhoneg !**



Keneiled ker,

Gant dale e kasan deoc'h ma adkomanant da vBremañ a lennan bepred gant dudi.

Kelenn a ran brezhoneg hevlene en daou lise eus Pariz -Voltaire ha Buffon- ma oa Ronan Tremel ouzh hen ober em raok. Mont a ra mat awalc'h an traoù : un hanter kant skoliad a zeu ingal d'am c'hentelioù. Dedennet int gant ar poentoù a c'hellint tapout a-drugarez d'ar brezhoneg, dreist-holl. Un nebeud anezho, Bretoned a orin, o deus c'hoant da genderc'hel gant hor yezh goude ar vachelouriezh avat.

Evit ar re all, a bep seurt orin, e chomo ar brezhoneg da viken ur yezh da vat, deli-zek da vezañ kelennet ha saveteet. Ne vo ket o yezh, avat. Aze emañ an diforc'htre Pariz ha Breizh. Er vro e rank ar gelennerien brezhoneg stummañ brezhonegerien evit an dazont, lakat hor yezh da vezañ yezh o skolid.

A galon ganeoc'h, Gwenael Emelyanoff.

Gant glac'har e roomp deoc'h da c'houzout ez eo aet da Anaon an Itron

ADRIENA VANDORNE

d'an oad a 86 vloaz, e Roeselare (Bro-Flandrez) d'an 13 a viz c'hwevrer 1990.

Rlet e voe dezhi tec'houit kuit eus he bro e-pad ar brezel-bed kentañ. Hi hag he ziegezh o deus kavet un degemer mat e Sant-Laorans e-kichen Bear (Bro Dreger)

Chomet eo ur Vreizhadez a galon he buhez-pad. Diskouezet he deus d'he c'hevinianted ha keviniantez an hent war-du o gwizioù kelt hag ar brezhoneg.

Doze d'he fardono !

Kasit bannieloù e-leizh evit manifestadeg Roazhon. Kalz manifestadegoù all a vo!

Emañ AN HERE o Klask I sekretourez-renevez (skiant-prenet) Kas ur C'h-Curriculum-Vitae : ru Gay-Lussac - 29120 Ar RELEG - Mallus eo!

Kemennadenn Skol an Emsav

Gant souezh, ret eo anzav, e lenne izili burev SKOL AN EMSAV, e-pad o emvod, e oa aet o strollad da get hervez niverenn 52 EMGANN dindan bliunn H.B. Ha kement-se e ser ur skrid-barn diwar-benn 100vet niverenn BREMAN.

Faltaziñ marv ur strollad all (dreist-holl pa vezer bet e-barzh), a zo un doare, moarvat, da grediñ e vezer kreivoc'h.

Erlin, tasmant SKOL AN EMSAV n'en em zibab ket fall c'hoazh. Evitañ da ober nebeutoc'h a drouz, n'eo ket lavaret e vefe diefedusoc'h eget gwechall, pa oa kalz birvilh annañ, met ivez nerzh foranet en aner a-wechoù. Ouzhpenn merañ hag ober war-dro BREMAN e aoz bepred SKOL AN EMSAV kentelioù-noz, stajou, dibennoù-sizhun (70 stajiad a oa e Sant Malo e fin miz Genver) e-unan pe gant kevredigezhioù. Kemer a ra perzh e buhez meur a aozadur e Breizh. Un doare all eo da labourat. "Labour ramzel sekretourez ha

skipailh BREMAN", evel ma skriv H.B., a zo e gwirionez hini sekretourez Skol an Emsav, hec'h izili, ha skoazellerien skipailh BREMAN. Arabat disoñjal kennebeut ar re na reont ket war-eeun war-dro BREMAN, met war-dro mererezh Skol an Emsav dre vras ha ne vefe ket eus ar gazeleñn hept, hep an emvoudoù diwezhat en noz a-wechoù.

A-hend-all eo faos a-grenn skrivañ ez eo bet BREMAN "kazetenn nann-ofisiel" Skol an Emsav hag eo deut goude-se "da lezel ar gomz gant tud ha strolladoù na oant ket dalc'hmata du gant menzioù diazezerien ar gazeleñn". Faltazi eo c'hoazh : a-viskoazh ez eo bet digor BREMAN koulz d'an hiniennoù ha d'ar strolladoù o deus bet c'hoant reiñ o soñj. Evit SKOL AN EMSAV ur gazeleñn gant ul linen bolitikel bannak da zifenn, nemet ar hini da vezañ ur benveg-keloufñ he daremprediñ evit ar vrezhonegerien mennaet da zifenn o gwirioù.

Burev SKOL AN EMSAV.

F.O. hag ar Brezhoneg

Feuket on bet evel an ao. F. Le Moigne gant komzoù ma c'hamalad Marc Hebert e doug un emvod eus Kuzul Ekonomikel ha Kevredigezhel Breizh diwar-benn ar "skoazell re vras" hervezañ a c'hellje bezañ roet d'ar brezhoneg.

Eveljust e ran ma seizh posubl evit reiñ da anaout d'hon dileuriad n'on ket a-du tamm ebet gant seurt emzalc'h met fellout a rafe din ouzhpenn gervel an holl re, anezho izili eus ar sindikad FO ha brezhonegerien ha goullenn

outo skrivañ war eeun d'ar c'hamalad Marc Hebert Union Locale FO 29200 BREST evit diskouez dezhañ o enebiezh. Ret eo dezho memas tra gouzout n'eus ket bet morse un emglav en diabarzh hor frammoù kengevredet war an dachenn-mañ.

Trugarez da VREMAN ha d'am c'hamaladed en araoz.

Pierre Karloc'h, Sekretour Departamantel FO er PTT (Pann ar Bed).

ERRATUM

Pennad "GOULEIER GWER ha GOULEIER RUZ" embannet e niverenn 102 Bremañ miz c'hwevrer 90 a zo bet troet gant Jil Killevere diwar ur studiaden graet gant Jean CHESNEAU, kelenner e Skol Veur Paris VII hag embannet e "Le Monde Diplomatique".

Stourm

MANIFESTADEG E ROAZHON

D'AR 17 a viz MEURZH

DA BEP KEVREDIGEZH EZ EO DIVIZOUT EN HE FRANKIZ DERC'HEL HA DIOUZH RET GWELLAAT HA PINVIDIKAAT AN TALVOUDOÙ A SELL OUTO EVEL DIAZEZ HE FERSONELEZH



Kemennet en deus sekretourva Ministr an Deskadurezh ne c'halle ket an Aotrou Jospin degemer kelennerien UGB e Roazhon d'ar 17 a viz Meurzh, pa vo-ñ o kemer perzh e kendalc'h ar "P.S." ur pemp kilometr bannak eus kreiz-kêr.

Meur a lizher a oa bet kaset abaoe bloaz gant Tugdual Kalvez, Prezidant UGB, da c'houlenn digant ar ministr degemer ar gelennerien vrezhoneg. Ar wech kentañ e oa dezhañ reiñ ur respont. Ha pebezh respont ! Ne ginnig nemet mont da welout ar rektor n'en deus gallout ebet da reiñ ar postoù-kelenn pe ar stummadur a zo ezhomm.

Ouzhpenn-se en deus nac'het ar ministr, ouzh kanned eus Breizh a oa aet d'e welout, reiñ ar postoù goullennet.

Garvel a ra UGB eta holl vignoned ar brezhoneg da zont da Roazhon, d'ar 17 a viz Meurzh, da vanifestiñ ha da huchal war ar ministr-se a ra goap ouzh ar vrezhonegerien hag a labour da vougant hon yezh.

Emgavioù all a zo bet goullennet digant Yvon Bourges, prezidant ar C'huzul-Rannvro, ha digant Radio Arvor hag FR3.


Yann LESKILDR

An holl e Roazhon d'ar 17 a viz Meurzh evit :

BREIZH ADUNANET, KELENNERIEN BREZHONEG EN HOLL SKOLIOÙ, BREZHONEG BEMDEZ ER SKINGOMZ HAG ER SKINWEL, BOIKOT AN NIVERIDIGEZH

Garvel da vanifestiñ a ra ivez DAZONT-USV, CRB, POBL, EMGANN, KUZULIOÙ SKOAZELL DA G. KABON, GWEZENN REDON, SKOL AN EMSAV, SAB, DASTUM, UDB...

ADKOUMANANTIT 150 lur ar bloaz DA V-bremañ bremañ 3



NIVERIDIGEZH

DROUK-KINNIG ?

Kreisteiz hanter e oa ha poent e oa disterniañ ur pennadig rak goude ur mintinvezh emvod, eurvezhioù da zivizoù tonket da verkañ amzer da zont hor yezh e ra vat diskuizhañ ur frapad ha pa vefe en ur "snack" bennak.

Vat a ra cheñch kaoz ivez ha goude bezañ peuret war tachennoù ar skiant en em ginnig an niveridigezh da zanvez preder ouzhañ taol.

"Un drouez eo ne vefe ket gouest an Emsav da vezañ a-unvouezh war ar poent-mañ."

"Re wir, da dud droc'h e tremenomp

a zegas da soñj e c'hellfe bezañ feuket an dilennid gant ar boikot, met ouzhañ o seloau e vefe tu da grediñ eo eus ar hanter an dilennid ez eus kaoz. Arc'hant ar Vretoned eo kouskoude ... Talihoù a baomp, re vat e ouzomp n'hon devez ket hon c'hont en-dro gante met gouenn digant ar Stad chom hep digas arc'hant an talihoù en-dro da Vreizh a zo diskouezh un tamm re a vrokusted e-keñver ar Stad C'hall. Ne vefe ket talihoù e baolemp neuze met un truj, un drouk-kinnig evel ma skriva Kervarker. Setu padra da blantañ debron e eskern Nevenoe ha reiñ c'hoant d'e dastmat troc'hañ goñg ur merour galgar bennak.

gwirioù ar brezhoneg, n'o deus ket bet graet berzh gant ar gouarnamant betek hen. NE C'HELL AR BOIKOT BEZAÑ NEMET A-ENEP POBL VREIZH SIWAZH.

Evel just ma vije bet savet a-du an holl evit gouenn gant ar Vretoned diskleriañ muioc'h a dud evit na'z eus e Breizh e gwirionez e vije bet un doare da sachañ muioc'h a yalc'hadou da Vreizh. Heskinet e vije bet un tamm mat muioc'h gouarnamant Pariz rak diwar goust e wennaen e vije bet hevelep boikot ... Tu 'zo da grediñ e vije bet klevet azgouennou an Emsav ar wech war-lec'h.



ur wech ouzhpenn !

"Sklair eo an traoù kouskoude ! N'eus gouenn ebet diwar benn ar brezhoneg n'hon eus ket da respont !"

"Buan ez ez gant memes tra ! Arabat lakaat ar vaered da sevel a-enep deomp. Me a lakay ma anv hag hini ma bugale war ar lollenn met netra ouzhpenn !"

Lezel a rin ac'hanoc'h da ijinañ penaos ez achuas ar gaoz gant hon zri gomper gwall souezhet ma oant o welet ne oant ket a-du.

Ker souezhet all e c'helled bezañ o lenn niverenn diwezhañ "BREMAN" rak ken enebet all e oa ar galvadennou da geñver an niveridigezh.

Souezhet on bet mamestra o welet ne oa den o terc'hel kont eo diazezet brokusted ar Stad war niver an dud a gontir e pep parrez. An hini-mañ-hini

Ur souezh eo ar perzh bet c'hoarizet gant tud en em lak da "vroadelourien" en ater-mañ. An holl dud e Breizh o deus bet klevet anv eus ar boikot, ken digor ma 'zo bet evit an digouezh kazetennoù bras ar vro, radioù ar vro, ha chadennou tele Pariz zoken ... Hag an holl da reiñ da glevet mouezhioù liesseurt hag enebet an Emsav. Met ne glevet den o laret sklair a-enep da biv eo ar boikot. A-enep d'an INSEE marteze ? Met n'eo an INSEE nemet ur benveg, hini ar Stad hag he gouarnamant. A-enep d'ar gouarnamant e vefe neuze ? Perak e vefe chalet ma n'o deus ket c'hoant ar Vretoned bezañ niveret ha kaout e-giz-se o lod eus ar yalc'hadou a vez diet dezho ? Muioc'h a vo evit Bro Barz en deus ezhomm da baeañ kement a labourioù bras ! A-enep dilennid Breizh e vefe marteze ? Ne weler ket re vat peserit ger o deus da laret en ater-afet : 74% eus kumunioù Breizh Izel (430) o deus sinet ar mennad kinniget gant Emglev Breizh evit gouenn ul lezenn evit difenn

Ha p'emaomp gant enklaskoù ... klevet ho peus anv marteze eus an enklask bet graet nevez 'zo evit ar Chuzul Rannvro. Harvezañ a oa 19% eus ar vretoned a lavare bezañ Breton a-raok bezañ Gall, 24% eus ar vretoned a sonje dezhe e oant Gall a-raok bezañ Breton, ar re all ne ouient ket ... Gant sifroù aval-se ez eus tu d'eo em c'houlenn perak e vez kent freut eostad strolladoù politikel an Emsav ar votadegoù. Ne vez ket brudet o savboent gant an doareoù-kelaouin marteze ... Afer an niveridigezh he deus diskouezet e c'hellent lakaat o soñj da vezañ klevet kouskoude ...

Ha ma ne vefe ket sirius a-walc'h o skeudenn e-touez ar Vretoned ? Un dra 'zo sur n'eo ket en ur c'houlenn gant an dud lezel Pariz da zerc'hel he yalc'hadou gant e vint lakaat da dud siriusoc'h ...

Yann PENNHALEG

Stourmoù

KELEIER BREIZH

SKOL AN EMSAV : KAS WAR-RAOK BREMAÑ HA KENURZHIEREZH SEVENADUREL BREIZH

Emvod burev Skol an Emsav, an 2 a viz Meurzh, a zo bet gouestlet, evit an darn vrasañ, da VREMAÑ ha Kenurzhierzh Sevenadurel Breizh.

BREMAÑ a gendalc'h da zont er-maez bep miz. Gwellat eo ar stumm a-drugarez d'an urzhiaerezh ha d'ar re a labour ganti. An darvez a zo da vezañ gwellaet c'hoazh. Meur a ginnig a zo bet graet. Mankout a ra pennadoù muioc'h liesseurt. Soñjet eo bet reiñ un digoll bennak evit tud a savfe pennadoù kazetennerzh war ziazezoù reolennoù a-vicher. Savet e vo ivez ur stal kazetennerzh evit gwellaat trioù micher ar re a skriv ha kavout kanskriverien nevez.

A-raok lakaat ar gazetenn da zont a-lesoc'h er-maez, ar pezh a chom ur pal, e vo re studiadig gwelloc'h penaos. Emvod ispisial a vo graet evit-se. Met ret eo ivez kreskiñ niver al lennerien. Mont war-du ar re yaouank a seblant an doare nemetañ ar re a studi brezhoneg er skolioù pe gentelioù-noz. Dre ar plas lezet dieub gant "Evit ar Brezhoneg" e vefe tu, pe da lakaat ur stagadenn divyezhek a diabarzh BREMAÑ evit dedennañ muioc'h ar re a zo o teskiñ, pe embann ur gazetennig divyezhek distag.

Raktresoù Kenurzhierzh Sevenadurel Breizh Burev Europa a zo bet pleustret warno ivez : en tu-hont d'an niveridigezh, he deus kinniget Skol an Emsav sevel "Breujoù Breizh" o vodañ un niver bras a zileuridi da lakaat an Emsav sevenadurel hag efedusoc'h ha da sevel diazezoù ha palioù boutin, war boentoù 'zo d'an nebeutañ, d'e labour ha d'e stourm. Ar breujoù-se a challe bezañ savet gant skoazell Kuzul Sevenadurel Breizh.

A-hend-all ez eus war ar stern ur geriadur skeudennel "1000 ger 1añ hor yezh". Ur studiadenn zo bet savet evit prenañ binvioù all da vezañ gouest da respont gwelloc'h da ezhommoù BREMAÑ, d'ar c'hevredigezhioù all ha d'al labour diabarzh. Stummadur ar re a labour, animatourien hag impiljidi, a zo bet studiet ivez. En deiz a-hiziv, hep en em stummañ dibaoez, ne yeer ket war-raok met war gil.

KEMENNADENN

Gervel ar Vretoned a ra EMGANN, emsav sokialour evit dieubidigezh vroadel Breizh, da ziskouez o mor a-enep ar Strollad Sokialour bodet ganto o daal e Roazhon d'ar 17 a viz Meurzh 90.

Dre se e fell deomp degas da soñj da izili ar strollad-se, ha d'e zilennid breizhat pergen, ar pezh o devoa diskleriet war an adreizhadurioù da seveniñ war an dachenn bolitikel ha sevenadurel, a-raok bezañ bet tapet gant "hollegouriezh ar gouarnamant" a zo abeg da zilez o angoustadurioù.

Abalamour ma n'int ket bet devonet zoken il live eunañ e ch'val ar-dro EMGANN da volkotiñ an niveridigezh, azoet gant an INSEE.

KEMENNADENN A-STROLL

An aozadurioù : EMGANN, UNVANNIEZH DEMOKRATEL BREIZH, an emsavoù ha kevredigezhioù : STOURM AR BREZHONEG, SKOL AN EMSAV, BREIZH BREMAN, kreizenn sevenadurel EGIN Karaez, ar MRAP (An Oriant) a sav groñs a-enep da gomzoù Thierry de Beaucé, sekretour-stad evit an darvoudoù sevenadurel etrevroadel. Da gervel dovezhioù-kelañ tud yaouank Europa ar Reter hag ar C'hornog, azoet gant "S.O.S. Racisme" e Pariz, eo savet a-du de Beaucé gant "perzhioù sevenadurel Europa dezhi hec'h unan, ar gwarez nemetañ ouzhañ talvoudekadur dreist-muzul ar sevenadurioù bihan a-ziforc'h." (O.F. an 8/02/90).

Goude bezañ klasket sevel perzhioù sevenadurel gall o kompezañ hag o voustrañ ar re all -gant dismegeañ ouzhañ sevenadurioù bihan taget gant de Beaucé- ha klask a rale hiri ar Stad C'hall astenn he doareoù war Europa a-bazh ? Lorc'hus e hañval deomp bezañ d'an nebeutañ, o vont a-enep d'an amdroadur a-vremañ a verzer ken drouz tu ar Reter ken drouz hini ar C'hornog, bapred (nemet e Bro-C'hall).

Hañval a ra ivez an Aotrou de Beaucé chom hep gouzout ne vez ket krouet parzhioù sevenadurel nemet maget e vezont gant an amzer dremenet, ur spered kumuniezh hag ur yezh a ra pinvidigezh ur bobl.


Doujañ d'he fardhioù liesseurt hepken a c'hello reiñ da Europa an habaskder en deus graet diouer dezhi betek hen.

Renerien Bro-C'hall a hañval kaout ur mennoz gwall izel eus ar pezh a vo Europa da zont.

En dibenn, en em c'houlenn a ra an aozadurioù a sin amañ peserit c'hoari eo hini S.O.S. Racisme en degouezh-mañ : kanoberour (pe benveg) ar brizh-karantez-vro sevenadurel gall.

Sinerien :

EMGANN : A. LE GARS, U.D.B. : H. GOURMELEN, S.A.B. : O. DUGOU, SKOL AN EMSAV : T. LOUARN, AR FALZ : J.R. LE QUEAU, BREIZH BREMAN : I. COCHEVELOU, MRAP : F. ESUERDICH, Kuzul skoazell da G. Cabon M. HERJEAN, C.C. EGIN : G. LAMBERT.



KABON E BREIZH !

Goulnet o deus ar C'huzulioù-skoazell da G. Kabon bezañ resevet gant ar Ministr Kentañ da vara kendalc'h ar P.S. e Roazhon.

Digant mignonned Gilbert Kabon e c'houlennont skrivañ da rener toull-bac'h Fresnes en deus lennet digant ar prizoniad politikel ar gamb-studier en doa bet ur pennadig. Gallout a reer gwelout aze efedoù e zilennadur e kuzul skol-veur Roazhon a seblant dispiljout kaer d'ar valestradurezh. E Bro-C'hall e vez enoret an dilennid toull-bac'h, an doullbachi dilennet avat a vez kastizet. Chomlec'h rener toull-bac'h Fresnes : Allée des Thuyas, 94261 Fresnes-Cedex.

BOIKOTIN HA CHOM HEP OBER

Emañ an "Dilennidi Vrezhonek" a-enep boikot an niveridigezh, rak koll arc'hant a c'halle o farrezioù ma tigresk ar boblañs, dre ma vez roet skoazell arc'hant gant ar stad diouzh niver an annezidi.

Parak ne glevomp ket an dilennidi-se (hag an Emsav politikel kennebeut all !) o huchal abalamour d'ar sistem brein-se a lak ar Vretoned da baeañ o zailhoù da Bariz, ha da c'hortoz an aluzon a vo roet dezho diwar ar bern o devo roet ? An demokratelezh santel gall eo se. Ma klaskfe Brussel lakaat ar c'hallaoued da blegañ d'ar sistem-

se en Europa warc'hoazh e vefe reuz ! Ar Vretoned a bleg hag a dav !

E Normandi, war ar maez don, e vo serret skolioù. Hag an dilennidi o deus embannet e oant o vont da voikotiñ an niveridigezh keit ma ne vo ket sur e chomo digor o skolioù. E Breizh n'o deus netra da c'houlenn an dilennidi vrezhonek ? N'o deus ket sinet goulnnadeg "Emglev Breizh" evit ma vo anavezet ez-ofisiel ar brezhoneg ? Evit ur wech ma c'hallfent gwaskañ un tamm war ar stad e-lec'h klemmichat e kavont gweli harzhal gant ar chas.

Tangi ar Bleiz



ADUNANIÑ HAG ADTROC'HAÑ

Skrivet en deus prezidant UGB da brezidant ar Republik C'hall da c'houlenn ma vo adunanaet Breizh. Respontet eo bet gant ar c'hargad Jean Kahn ne vefe selaouet arguzennoù UGB "ma vefe kaoz eus adtroc'hañ ar rannvroù". Adunaniñ, adtroc'hañ, ne gomzomp ket ar memes yezh, ha pa rafemp gant ar galleg !

Y.L.

POST

Ne blij ket da lod, en ti-post, e vefe skrivet emañ Bro-Naoned e Breizh. War an digarez-se ne zegemeront ket al lizhiri. N'eus nemet ar speredoù fall avat a welo aze ur skwer all a wallziforc'herezh : ma ne blij ket ho stumm da skrivañ chomlec'hioù d'ar post gall ne vo ket kaset ho lizher, dre an abeg politikel ma ne blegit ket da anavezout rannadur Breizh.

KELEIER

POLITIKEREZH

* Bloavezh Bro-C'hall e oa 1989 e Bro-Indez, a-hervez, ha gouelioù bras a oa bet aozet eno da neuze gant ar c'hannati, ha daou soner eus Roazhon, Baron hag Annelix, a oa aet di da c'hwezhañ er bez. Abaoe ma z'eus bet gwerzhet ur greizenn nukleel da Bakistan gant Fañch Mitt' avat n'eo ket sur e vefe ken uhel ar brud gall en Indez ken, pa zeu en-dro bep an amzer keloù a vrezel etre an div vro amezek.

* Bec'h 'zo en Afrika, hag ar bobl, eno, a heuilh skwer vat ReterEuropa e-lec'h ma ne blij ket ken ar "strollad nemetañ". Met ne dalv ket an demokratelezh evit ar re zu : savet e oa Chirac da zifenn ar "strollad nemetañ" en deiz-all, e ti e vignon Houphouët-Boigny.

* Derc'hel da zifenn Gwirioù Mab-Dan a ra an ti kleiz avat : evit plijot da Omar Bongo, diktatour Bro-C'hahon, ez eus bet skarzhet gant Joxe un enebere danjerus a oa o chom e Bro-C'hall.

* A-drugarez d'an dekred, ez eus bet kaoz, evit ur wech er c'hazelennoù, eus labour fichennañ ar bolis hag ar justis. Nulet eo an dekred, ha derc'hel a reer da fichennañ, a-enep al lezenn etia. Met pell zo e oar darn eus an emsaverien e vez ezvhiat o lizhiri, o fellgomz hag o bodadegoù, e vezont heuliet noz-deiz a wechoù, hep menegiñ ar re a vez gourduzet gant ar bolis politikel c'hall.

* Tra ma oa "Amnesty International" o tiskuliañ ar jahinerezh e toullou-bach Marokko e weled war pajennoù kentañ "Le Monde" ha "Libération" bruderezh diwar-benn ul levr gant ar roue Hassan, a zo o paouez lidañ e zeiz ha bloaz.

* Da geñver an darvoud-meur-se lidet gant Konsul Marokko e Roazhon e oa dileuridi eus ar c'huzul-kêr en doa degemeret kannadourien eus Bagdad er mare ma oa Amnesty o'h embann danevelloù diwar-benn jahinadur bugale Kurdistan gant arme ha polis Irak, armet gant ar C'hallaoued.

KELENN

PER DENEZ : PRIZ "RAMON LLUL"

D'ar Merc'her 21 a viz C'hwevrer e embanne holl gazetennoù pemdeziek Kêr Barcelona ar c'heloù e oa aet ar pempvet priz strevroadel "Ramon Llull" gant ar breizhad Per Denez, skrivagner ha kelenn brezhoneg a Skol Veur Breizh Uhel e Roazhon.



D'AR STOURMER

Roet eo bet ar priz da Ber Denez gant Kendalc'h ar Sevenadur Katalanek (harpet gant Ensavadur ar Studiu Katalanek) an abeg d'e labour evit "ar yezhoù ha pobloù hep stad", re Vreizh koulz ha re Gatalonia.

Muloc'h eget ar skrivagner pe ar c'helenner eo ar stourmer an deus fellet d'ar varmerien loreañ, rak evel ma lavar Joan Beate, rener Kreizenn Enklask ha Studiol Katalanek Skol Veur Perpinyà, (hag ezel eus ar bodad-barn), "eñ an hini en deus gouzvat dilramañ digant ar stad Jakobin an aotrogezh vrezhonek e 1981, ha digeriñ an hent da yezhoù all ar Stad-C'hall, d'ar C'hatalaneg pegen".

UR C'HAER A BRIZ

Er miz-mañ e tlefe Per Denez mont da vBarcelona da gerc'hat e briz (ur milion a besetas). Merteze (piv 'oar ?) e kavo kazetennoù pemdeziek hon bro tro da gomz eus an darvoud-se a-benn neuze, ma n'eo ket re estren dezho kement tra a denn da sevenadur Breizh.

Mark KERRAIN (Diwar pennadoù kasat deomp eus Katalonia gant Lluis Felip)

DESKADUREZH BRO-NAONED

Hervez an enklask graet gant Rector Naoned e vez graet skol vrezhoneg e 3 skol nemeten en departamant-se : e skolañ Albert-Vinçon e Sant-Nazer (27 skoliad) hag e liseoù Les Bourdonnières (24 skoliad) ha La Colinière (7 skoliad) e Naoned.

BRO-GWENED

Embannet eo bet an enklask graet gant ensallerezh-akademiezh ar Mor-Bihan diwar-benn ar skolaerien hag ar brezhoneg. Diwar an 2147 a zo o doa respontet 1445 (67,30%) d'an enklask. 120 anezho (8,3%) a ra gant ar brezhoneg er gêr pe gant ho mignoned. Diwar ar 120-se n'eus nemet 3 a ve prest d'ober war-dro ur c'hlas divyezhek (goude bezañ stummet). 16 a rafe a-walc'h skol vrezhoneg e-pad an eurvezhoù ordinel ha 26 a grad e vefent gouest da gelenñ lod eus an danvezioù e brezhoneg.

Goulennt ha doa UGB Bro-Roazhon e vefe graet un enklask hañvel ivez. Daoust da bromesa an eil enseller Cormerais n'eus bet graet netra war a seblant !

BREZHONEG ER SKOLIOU

Kelennerien brezhoneg zo a oar kaout intrudu, evel hini lise prevez Sant Visant e Roazhon.

D'ar Yauo 8 a viz Meurzh eo bet aozet gantañ ur vodadeg er skol-se diwar-benn "ar brezhoneg hag al labour" gant kuzulierien eus DIWAN, STUMDI, ha SKOL UHEL AR VRO.

Gwir eo e vez aesoc'h (a-wechoù !) sevel seurt abadennoù er skolioù prevez eget e skolioù-stad. Koulskoude n'eo ket er skolioù prevez e ya war-raok hon yezh c'hoazh !

Diskouezadeg zo bet ivez e trepas bras ar skol diwar-benn ar brezhoneg. An doare gwellañ moarvat da gelaouiñ skoldi na glevont morse tra a-zivout hon yezh a-hed bloavezhioù-skol.

CAPES

D'ar 26 ha 27 a viz Meurzh e vo tremenet gant ar studierien amprovennoù dre skrid ar C'hapes brezhoneg.

D'an 9 a viz Mae e vo amprovennoù ar C'hapes Korseg, en abeg da boikot ar c'hentelioù graet gant ar studierien n'int ket a-du gant ur C'hapes daoubennek, nemet boikotiñ a vefe graet ivez gant kelennerien ar juri, evel ma c'houlenn an SCI (sindikadur ar skolaerien).

UR PREFED E PENN SERVIJOU AR RANNVRO !

Aet eo kuit eus Breizh an Aotrou Guy Barriolade, pennrener servijou Kuzul Rannvro Breizh-4, da vat da Lyon, da gichen ar maer RPR. Deuet e oa amañ gant Raymond Marcellin (bet ministr an Diabarzh dindan Pompidou a-raok bezañ prezidant Kuzul Rannvro Breizh-4) e 1982, hag en un ijnour war an atmerezh, ganet e Bro-Savoia. An Aotrou Barriolade eo en doa ijinet "logo" ar rannvro gwer ha glas a zo bet darbet deomp gwelout evel banniel Breizh rannet an deknokratad. Un enabour touet d'ar rannvroalezh e oa anezhañ eta, ha ne vo ket keuz dezhañ.

En e lec'h hon eus gounezet ur prefed ! Met a-raok bezañ prefed al "Landes" (departamant kankiz-hañv prezidant ar Republik) e oa an Aotrou Jean Cuvelier e penn servijou Kuzul Rannvro ar "Peyidolour" (gwalc'h ho kenou goude distagañ ar ger), e-lec'h ma labourer brav ivez a-enep da adunanidigezh Vreizh, gant Olivier Guichard, kannad RPR ar Baol, ha prezidant kuzul ar rannvro-se. Sur etia ne ray mann da zispilout d'e veñt kozh, ha n'eo ket e veñt nevez Vron Bourgas, prezidant RPR Kuzul Breizh-4, a glaskte reiñ tro dezhañ ober.

Difennet mat e vo hon bro gant an den-mañ, ha ne vo ket da sbeuzhiñ ma vez goulennt gant manifesterien ar 17 a viz Meurzh e vefe skarzhet an den-mañ. (Diwar gelaier eus "Peuple Breton", miz Meurzh 1990).

Alan PENNEG

Kembre

Ur plañh yaouank e norz Kembre a ro he dilez : difennet e oa outi komz kembraeg war he labour.

14 A VIZ KERZU : AN EMGANN

Sharon LEWIS, implijet e burevioù ar gompagnunezh Dawson Wales ha DT, he deus roet he dilez goude un diviz gant he rener saoz Frederic DAWSON. Hemañ an devoa goulnennet na vefe komzet nemet saozneg war al labour.

Displeget eo bet gant Sharon LEWIS : "Emzalc'h Mr DAWSON zo bet spontus : digoret en deus ur stal e Kembre, perak neuze n'en deus ket c'hoant e vefe komzet kembraeg ?"

Diouzhtu en deus ar strollad "Gwirioù ar c'hembraeg" (CEFN) kemeret en e garg an afer evit gwelout hag-eñ e vefe tu gant F.DAWSON respont dirak ar justis : "Emaomp o prientiñ un heuliad gant Kuzulioù hon advokad ha sikour Kuzul ar c'hembraeg" he deus displeget Eleri CARROG, sekretourez veur ar CEFN.

Klemmet en deus Mr DAWSON a-zivout an taolioù pellgomz en deus bet : "Laret ez eus bet din ne oan nemet ur bastard saoz". Displeget en deus ivez en doa lakaet sklaer an traoù e-pad ar c'homision implij, o resisaat na vefe aotreet nemet saozneg el labour pe gant ar pratikoù pe etre an implijidi. "Lavaret he doa Sharon LEWIS e oa saoznegerezh ha ne vefe ket ur gudenn, met n'he deus ket doujet d'he framesa" en deus kendalc'het Mr DAWSON. "Teir gwech dija em boa komzet ganti a-zivout an dra-se, ha d'ar bedervet he deus roet he dilez".

"12 vloaz zo ez eo bet krouet ar stal amañ ha n'on ket enep kembraeg : 8 diwar 10 implijad a zo kembraegerien". D'en em zifenn en deus pouezet Mr DAWSON war ar led ez eo ar glianted eus a bep lec'h. Setu perak e veze graet an aferioù e saozneg. Laret en deus zoken en doa klasket deskiñ kembraeg met re ziaes e oa bet d'e oad, 65 bloaz. Klemmet en deus c'hoazh, peogwir, hervezañ, e tiranke Sharon LEWIS an implijidi all o komz kembraeg ganto pa glaske ar re-mañ labourat.

UR VEZH

Sharon hag he doa kroget e miz Eost he deus lavaret : "Perak ne oan aotreet da gomz kembraeg nemet e-pad ar predoù hag ar trapadoù diskuzh ? Komz a ran saozneg er burev pa'm boa d'hen ober ha pa oan e darempred gant pratikoù n'anavezet ket". Eleri CARROG, sekretourez CEFN he deus diskleriet : "Hoc'h emzalc'h a zo diktatorel. En 20vet kantved ne c'hellomp ket kaout



pelloc'h ar spered sklavour-se". Kuzul kanton Dwyfor en deus votet diouzhtu ur mennad o kondaoniñ ar gompagnunezh. Ar mennad a zo bet votet a-unvouezh.

20 A VIZ KERZU : AN TREC'H

"DIGAREZ" a c'houlenn ar rener ouzh Pobl Bro Gembre. Rener embregerezh DAWSON hag an devoa lakaet reuz ha freuz da sevel er vro o lakaet berz war ar c'hembraeg en e stal labour en deus goulnennet digarez dirak "Broad Kembre".

Bremañ, an implijadeg Sharon LEWIS, 18 vloaz, ginidik eus Penrhyndeudraeth, a c'hello kaout un digoll arc'hant evit bezañ kollet he labour.

Dec'h en doa diskleriet Frederic DAWSON goude un emvod gant CEFN (Strollad Gwirioù ar C'hembraeg) : "n'em boa ket maizet pouez ar c'hembraeg, degemer a ran gwir an dud da gomz kembraeg war o labour e-giz e pep lec'h. Ne felle ket din tamm ebet ober fae war ar c'hembraeg, hag ez on a-du penn-da-benn evit na vefe ar yezh kentañ el lodenn eus ar vro m'emaon o vevañ. Ma z'eo bet komprenet ar c'hontrol e c'houlennan digarez digant Kembraeg".

Eleri CARROG, CEFN, he deus diskleriet : "un trec'h eo evit ar c'hembraeg".

(Pennad tennet eus ar Western Mail, brezhoneg gant E, RIOU)

Iwerzhon

UR PENNAD BIHAN ENTANUS

Er miz tremenet e oa bet laketaet ur vombezenn-dan e-barzh magazenn ur saoz nevez erruet e kardiadennig Rhosgadfan e Gwynedd. Ur pennadig war-lerc'h, setu degouezet dirak ti ar c'hoarier ha c'hoarier anavezet, Bryn Fôn, war ar maez don e-kichen Rhosgadfan, un toullad fikked ha chas. Gwelet int bet e-giz menien a-hed hag a-dreuz douaroù an ti-feurm. Ha dizolotet zo bet ganto tost diouzhtu ur sach blastik e-barzh ur c'hleuz hag ennañ "un dastumadenn neud-orjal" hag "a c'helle servij da sevel bombezennoù-lan", ar pezh a ra ar strollad kuzh "Meibion Glyndwr" beb ar mare abaoe muioc'h evit dek vloaz. Kemeret eo bet Bryn Fôn hag e vignonez, Anna, hag aet eo ar fikked 'barzh an ti d'ober ur pezh mell taol-furch. Antronoz vintin da 7 eur eo deuta ar fikked er wech-mañ betek ti ar c'hoarier ha skrivagner, Mel Jones. Hennañ ivez zo bet kemeret, asamblez gant un nebeut traoù tamallus-meurbet, bet kavet en e di, en o zouez plioù tredan hag ur stagell-montir. Er memes mare e Londrez, lech ma 'mañ o chom, eo bet kemeret ur c'hoarier kembraet c'hoazh, Dyled Thomas e anv. Dalc'het int bet holl e-pad 2 zevezh evit bezañ goulnennat diwar-benn o mennoziou politikel. Benn ar fin n'o deus kavet ar fikked netra da damall dezho, ha lezet int bet da vont. Abaoe, n'eus bet Bryn Fôn, hag a zo anavezet ivez evit bezañ savet ur ganaouenn diwar-benn an Deverien Dier, peder c'haritenn-bost bet kaset d'ar memes eur eus 4 lech dishevel ha sinet gant lizharennoù Meibion Glyndwr, ha war c'horre : "Gourc'hemennet, Bryn Fôn".

Hag er poent-mañ n'eus kaoz nemet deus an afer-se. Iskis e kav an dud mamestra e vefe c'hoarierien ar re a zo bet kemeret. Hag iskisoc'h c'hoazh, hervez ar pezh a zo bet klevet en tele abaoe, e oa sech ar sach blastik 'zo bet kavet barzh ar c'hleuz, daoust ma oa bet glav pil-polos e-doug ar sizhun-se. Lod a far zo un dan bannak o klask ober droug d'ar c'hembraeg en ur skeiñ gant harozad muiañ karek ar vuhez sevenadurel. C'hwitet n'eus war e daol : ar c'hoarierien-se a vez gwelet asamblez bep sizhun e-barzh un abadenenn tele farsus-kentañ an hini sallet ar muiañ e kembraeg diwar-benn ur strollad football anvet BRYN COCH. Ha bremañ bep noz barzh an tavarnioù e vez klevet an dud o huchal hag o kanañ a-bouez-penn "BRYN COCH -4, AR FLIKED -0". Ha n'eus bet paket dever-ti ebet, morse, abaoe maz eo bet distrujet an ti-hañv kentañ...

Ki-mouc'h Kembra

RET EO GOUZOUT IWERZHONEG



LEC'H AR BROADOU HEP STAD EN EUROPA

GANT YANN FOUERE

D'ar Sadorn 24 a viz Meurzh da 3 eur eus an abardaez e vo Yann FOUERE e OALED ABHERVE, kreizenn sevenadurel e Sant Brieg, 9 straed J.J. Rousseau.

Yann FOUERE, doktor war ar gwir, skrivagner ha stourmer, a gonzo eus Krouidigezh Europa ar Rannvroù, Ar broadoù hep stad aloubet pe staget ouzh stadoù all brasoc'h, hed ha hed an Amzer, a c'hello kavout adarre ar plas dileet dezho e Europa hep harzoù 1992.

Respontet e vo gant ar prezegenner d'ar goulnennoù graet an dud deuet d'e selau.

OALED ABHERVE, 9 straed JJ Rousseau, Sant Brieg. Kenlodeñ mizoù : 20 lur.

Gant Laz-Varn Kumuniezh Europa e Luksembourg eo bet anavezet gwir Republik Iwerzhon da c'houlenn digant estrañjourien gouzout gouezeleg evit kaout labour er vro-se.

E miz Du 1987 e oa bet sachet e evzh gant Bodad Kumuniezh Europa war istor ur gelenner eus an Izelvroù a oa bet nac'het outi kaout ur post en ur skol iwerzhonat, ha se abalamour ma ne ouie ket iwerzhoneg. Lavaret e oa bet gant kargidi Brusel neuze e oa arabat da Republik Iwerzhon rediñ an diavaezidi da c'houzout iwerzhoneg evit kaout labour.

Kement-se, hervezo, a oa kontrol d'al lezennoù europat eus 1968 a otre keodedidi pap hini eus an Daozsek Bro da gaout labour dindan ar Stad e broioù all ar gumuniezh, hag a zifenn ouzh ar stadoù da embann reolennoù a vefe ouzh Europiz all da gaout labour.

Lez Kumuniezh Europa a oa bet galvet da reiñ he barnadenn an afer. E dibenn 1989 e oa bet embannet ganti ne da ket politikerezh Iwerzhon, a ro ur statud da yezh ar vro, a-enep reolennoù ar Gumuniezh. Reiñ eo e klaske Stad Iwerzhon difenn he yezh, ha ne c'heller ket lavaret e klaske, evel-se, mirout ouzh an estrañjourien da zont da labourat eno. Daoust ma vez graet ar sko e saozneg en Iwerzhon, peurvuiañ, n'eo ket direizh, eme Lez Luksembourg, goulnenn digant ar gelennerien gouzout un tamm bennak a iwerzhoneg. Setu kadarnaet un tammig statud yezh Iwerzhon gant ul laz-vern etrevroadel.

An istor-se ne c'helle ket c'hoarvezout an tu-mañ da Vor Breizh. Rak evit labourat en deskadurezh-stad er vro-mañ e ranker bezañ keodedidi ar Stad C'hall ... Serret an nor d'ar re all. Sellta ! Ne dafet ket kement-se a-enep reolennoù europat 1968 ?

IKADORED



EUS BREST-LITOVSK

Eus an darvoudoù liesseurt a ya d'ober an dispac'h sioul a zo o reuvelizh Europa ar Reter, daoust da emsavadeg gwadek Romania, ez eus unan a vez divizet a-builh diwar er benn amañ hag ahont er c'helaouennoù, e Breizh, e Bro-C'hall pe e broioù all, da lavaret eo : dihun ar broadelezhioù(1). Hag a-dra-sur en em ziskouez ar fed-mañ evel unan eus doareoù heverkñ ar stourm a vez kaset da benn eno evit ar frankiz hag an demokratelezh.

Petra bennak m'o deus aon politikourien pe "arbenngourien" zo e tistabilite ar rann-se eus Europa abalamour da se -met Europa a-bezh ivez, peogwir e vefe en arvar neuze ar bevennoù merket goude an eil brezel-bed - e vo ret mat d'an dachenn a frankiz a zo dleet d'ar broadelezhioù bezañ kretaet e mod pe vod evit mirout ouzhi disemglevioù bet skornet e-pad ouzhpenn hanter-kant vloaz da sevel en-dro.

Anat eo d'an holl, tud e karg koulz ha keodediz ordinal, ez eus, gant digoradur ar "stign-houarn", ur stumm politikel nevez da dermeniñ evit Europa ha drempredoù all da seveniñ ivez etre ar rannoù dibar anezhi. Ha ne vo ket graet kement-se hep derc'hel kont just-a-walc'h eus kudenñ ar broadelezhioù.

D'ur mare m'emaer o redek war-lerc'h an Istor, ne c'hell den ober kinnigoù resis war an dachenn-se hep riski bras da faziñ. Bezañ war evezh ha klask lijñañ, en ur gemer harp ouzha an anaoudegezh hon eus an Istor hag an Douaroniezh, peseurt emdroadur a c'helle bezañ d'an darvoudoù a arvester outo bremañ n'eo ket diezhomm evelato.

Pa seller ouzha kartenn Europa, etre Bro-Alamagn ha Rusia, lec'h m'emañ ar stankañ ar bevennoù -ha dres, bevennoù a zo o c'hronañ ar pobloù a stourm hiziv evit o frankiz-int- e c'heller magañ ar spi e ouio ar broadelezhioù a vev aze kichen-ha-kichen, adalek Estonia betek Slovenia, mont dreist an enebiezh a zo bet -hag a zo c'hoazh alies- etrezo hag en em gevredñ tamm-ha-tamm, hep dinac'hnañ o gwirioù broadel avat, met en ur gompren, a-drugarez d'an demokratelezh emaint o liazezañ ha da hevelep skiant-prenet eus an

hollveliegezh, ne vo kretaet eurvad ebet dezho evit an dazont nemet en unaniez.

Ouzhpenn bezañ bet en hevelep yev e-pad daou-ugent vloaz, ez eus meur a dra boutin d'ar broadelezhioù-se ; hag un dra, an drevadennouriezh alamanat, a zo bet a-bep-eil evito edoug ar c'hantvedoù tremenet (adalek mare ar varc'heien deutonek betek hini an Trede Reich) mark an arakaat hag arouez meur o distruj, ne vo ket eus ar re disterañ evit reiñ korf d'unaniez gwirion hag evedus.

Al liamm hengounel ha sevenadurel-se a zo, d'am meno, ur chañs evit Bro-Alamagn ivez hag evit broioù pe stadoù Europa ar C'hornog a hañval bezañ gwall nechet gant stivoù an Alamanted evit adunvaniñ o bro.

An Alamanted a-vremañ a oar pegement en deus koustel dezho an daou vrezel-bed diwezhañ ha da belec'h int bet kaset pa vezent renet gant broadelourien brezelour hag alouber. Arabat disoñjal ivez eo bet rannet Bro-Alamagn e div lodenn m'o deus graet o annez enno reizhiadoù politikel kontrol an eil d'eben, hag o deus gouzañvet an Alamanted evel broadelezh, kement hag o c'henseurted eus broioù Reter Europa.

Klaouster o deus emskiant an Alamanted e vo ret dezho kenlabourat da vat gant ar pobloù o doa aloubet gwechall evit ma vo adskoulmet al liammoù naturel o deus bet a-viskoazh ganto.

Keal ur c'hevredad pe ur c'hengevredad broadelezhioù -n'eus diforc'h etre an daou c'her-mañ nemet e spered gwidreüs politikourien -zo-ma kemerfe perzh Bro-Alamagn ennañ, a c'helle bezañ ur respont a-zoare d'ar goulennoù a sav diwar ziskar ar bed komunour.

Da bleustrañ a zo warnañ, ha n'eo ket gant an d'Cheked, an Hungariz pe an Estoniz hepken -hep disoñjal an Alamanted evel-just- met gant kement pobl a vev en Europa ivez.

Rak, daoust pegen disheñvel ma vez live an dioradur en div rann eus Europa ha forzh pegen gwir eo e seblant bezañ an eurvad armerzhel, e broioù ar C'hornog, an hini nemetañ a dalv ar boan da strivañ evitañ, ne c'hell ket padout an darvoudoù o

deus roet d'ar bloaz 1989 an anv da "vloaz ar pobloù" hep kaout ul levezon war stummoù ar galloud ha war embregadurezh an demokratelezh er c'hevredgezhioù kevalaour.

Tu 'zo en em c'houlenñ hag-añ en vo ket un doare kontammadur kentoc'h a zo da c'hortoz a-raok pell a-berzh emsav bras ar Reter, rak, war veur a dachenn hag hini ar broadelezhioù da gentañ-holl, emañ hêrezh an Istor gwall bounner ivez en tu-mañ eus Europa.

Arouezius-kenañ ar pezh a zo bet roet da lenn er c'helaouennoù, evel e "Libération" d'ar 14 a viz Kerzu, diwar-benn ur mennad bet votet n'eus ket keit 'zo gant breujoù emren Katalonia. Er mennad-se o deus diskleriet dilennidi Katalonia, en un doare sklaer ha didro, e oa an "emsavveladur broadel" ur gwir n'o doa marse dinac'h et ha ne zinac'h bikan ar gKatalaniz. War heul breujoù Katalonia eo bet lakaet mennadoù heñvel da vouezhiañ gant dilennidi Euskadi -pezh n'eo ket souezh- met gant re c'hGalizia ivez.

Bec'h a-walc'h o deus graet ar mennadoù-se ken n'en deus ranket embann ar roue Juan Carlos, en e hetoù dibenn-bloaz, ne oa ket tu gouzañv e vefe lakaet unvaniez broadel Bro-Spagn en arvar.

Krediñ a raio lod n'eo seurt divizoù nemet gourdrouzoù a-berzh "rannbroioù" o c'houlenñ atav muioc'h a emrenerezh ha n'emañ na gKatalonia na Euskadi war-nes da vezañ broioù dizalc'h (met piv 'oar...'). Ez teurl a ra kement-se ez eus gant ar broadelezhioù ur gwirvoud fets na c'hell reizhad politikel ebet ober heptañ.

Tu 'zo ouzhpennañ memestra n'eo ket dre gouezh ma c'hoarvez d'ar broadelezhioù a zo dindan beli ar Stad spagnat da reiñ an hekliv kentañ d'an tabut meur a zo savet etre Berlin ha Moskov. E-pad pell amzer ez eur bevet gant an diktatoriezh en-tu-all d'ar Pireneoù ha di-se ivez en deus diskouezet an Istor, abaoe ar bloaz 1975, e ouie sankañ lizh ha lizh bras.

En ur lakaat keit-ha-keit darvoudoù Reter Europa gant emzalc'h pobloù "emren" Bro-Spagn ne ziskouezer ket hepken hollvedelezh un anadenn -hini

DA VREST



ar broadelezhioù- lakaat a reer war-wel ivez ez eo galloud ar stadoù -pe gevalaour pe varksour e vefent- a vez enebet outañ hiziv.

Helavar-kenañ an holl fedoù-se evidomp-ni Breizhiz, pe d'an nebeutañ evit al lod ac'hanomp a gred ez eus eus Breizh hag he fobl ur vroadelezh a zo dezhi un tonkad dibar ha gwirioù kevatal d'ar re a zo dleet d'an holl broadelezhioù ar bed.

An enkadenn speredel ha sevenadurel m'emañ Breizh enni hiziv an deiz, ha vir outi da gaout emlusk ha nerzh war an tachennoù politikel hag armerzhel ivez, e ouzomp mat ez eo dreist galloud ur Stad -hini Bro-C'hall ar c'hevoc'hkogn- a zo pennabeg dezhi.

Kreñv eo bet ar Stad C'hall, a zesker gant an Istor, e kement m'eo diazezet war geal ur vroad "ideologel" rik a zo bet strujet gant e-leizh a boall hag a ampartiz en-dro d'ar sevenadur gallek e-doug an tri c'hantved tremenet. Amañ e soñjan dreist-holl -met diaraogerien a zo bet dazho- e prederourien "sklerijennet" an XVIIvet kantved hag en aozerien an dispac'h bras a zo bet lidet e zaou c'hantved deiz-ha bloaz en doare bamus a ouzomp holl.

Ger-stur hon renerien eo c'hoazh ar c'heal-se e meur a geñver, evel m'zo deus hen diskouezet n'eus ket keit 'zo "Afer an Ichoad" hag ar gevodadeg "republikan" m'eo bet kaoz anezhi eus eil tu ar rummad politikour d'egile).

Ur seurt emzalc'h a ziskouez mat e vez sellet c'hoazh ouzha ur "Stadvroad" evel ouzha pimpatom ar Stad modern gant ar re a zo en em roet da bal da c'houarn Bro-C'hall deiz pe zeiz.

Ma n'eo ket bet ar c'heal-se hep kaout ul levezon war groudigezh ar Stadoù modern a anavezomp hiziv, arabat disoñjal e vez -en Europa da vihanañ- darn vrasañ ar Stadoù pe ziazezet war ur vroadelezh kenstag pe gempouezet o galloud gant aozadurioù kevredadel.

Keit ma rene an dizemglev en Europa etre broioù klozet mat o bevennoù -pa ne oant ket anebourien zaonet- he deus gallet ar Stad c'hall chom un ezreol politikel -hag un enezenn a zemokratelezh zoken pa veze sellet outi eus an diavaez.

Bremañ m'emañ "savidigezh" Europa kefridi veur ar mared, n'eus d'ar "Stad-vroad", evel meizad, reizhabeg ebet ken, pa n'eo ket d'ar "Stad" hec'h-unan.

Ar c'henvarc'had -daoust dezhañ da vezañ bet savet etre broioù ar rann gevalaour eus Europa hepken, eleze evit abagoù o tennañ d'an armerzh dreist-holl- en deus bet daou efed a-bouez :

Evit ar wech kentañ, o deus ranket ar stadoù dilezel un tamm eus o galloud ha moustrañ war o riegezh en ur dermeniñ reolennoù boutin hag en ur grouiñ ur parlamant dreist-broadel zoken. An eil efed a oa war vuhez ar geodediz o deus kemeret an tu da sevel liammoù etrezo a-dreuz ar bevennoù ha da anavezout gwelloc'h dre-se doareoù politikel ar broioù nesañ.

Breizhiz niverus o deus dizoloet a-drugarez d'an eskammoù-se e c'helle bout doujet ouzha gwirioù ar broadelezhioù "bihan" hep ma vije -dre ret- diwar goust ar broadelezhioù "bras".

Komprenet o deus ivez, ha meur a ziliennad hag a gargad ganto, e oa Europa hag hec'h aozadurioù al live ma oa ret da vBreizh bezañ klevet he mouezh ... Ha pa vefe evit difenn interesoù -evel re al labour-douar da skwer- ar paour-kaezh "rannvro" a zo

LITOVSK DA VREST

bet graet eus hor bro gant melestradurezh Bro-C'hall.

Tamm-ha-tamm e vez roet gant an emdroadur nevez-se un heklek d'ar mennoziou a zo difennet a-bell 'zo gant an Emsav (hini Breizh, ar wech-mañ) ha kavet e vez hiziv an deiz, betek e-touez politikourien ar "rannvro", da lavaret eo er strolladoù "gall", tud o soñjal d'zo eo ret da vBreizh bezañ kreñv hec'h hevelebiezh sevenadurel eviti da zont a-benn da ziorren hec'h armerzh ha kevezañ en un doare frouezhus gant "rannvroioù" all Europa a zo dija, evit ul lodenn vat anezho, mestr war o dazont.

Un dio fall e vefe a-berzh an Istor, ma c'hoarvezfe d'an Emsav trec'hin war dachenn ar mennoziou p'emañ ar vro, he yezh hag he sevenadur war o zremenvan.

Douget a-walc'h eo ar Vreizhiz -hag an emsaverien en o zouez muioc'h c'hoazh marteze- d'an dic'hoanag ha d'an emzistruj. Meur a abeg a zo d'ur seurt emzalc'h ; n'ouzon ket hag-ñeñ emañ an diouer a emfiziñs ar pennabeg pe an dibenn anezhañ, sklaer eo memestra eo deuet an doare-se da vezañ an hini boaziekañ eus hon temz-spered.

Peseurt stêr a zo neuze, evidomp-ni hag a soñj, dre ziouer a emfiziñs, ez eo digemmus an traoù da vat, gant darvoudoù ar reter ?

En ur ober tri miz eo kouezhet en o foull kreñvlec'hioù a oa evit padout da viken. Pet amzer hor bo-ni ezhomm evit ma vo anavezet deomp gwirioù - hag unan d'an nebeutañ : an hini d'ober gant e yezh e pep degovezh eus ar vuhez- na gredet mui nac'hañ ouzh broadelezh ebet ?

Ennomp-ni emañ ar respont, kentoc'h eget en avel a c'hwez eus ar Sav-Heol. Padal un dra a zo sur ; ma z'eo bet dic'houest bevennoù Bro C'hall da virout ouzh koumoulen skinoberius Tchernoil da saotrañ hec'h oabl digatar e miz Mae 1986, ken dic'houest all e vint da zwiall ouzh al lavr a wrez dispac'hel -ha speredel- a zo oc'h aloubiñ ar Bed kozh.

Treiñ a ra kein deomp an Istor ...

Poent eo en em soñjal, rak evit ar wech diwezhañ eo sur a-walc'h !

Alan MARTEL

1 Implijout a ran emañ ar ger "broadelezh" dre ma c'hell klotañ mat a-walc'h gant ar steroù disheñvel a vez roet, diouzh ma vezer e Bro-C'hall, e Bro-Alamagn pe e Breizh-Veur, da gaelioù evel "Broad", "kumuniezh broadet", "minoerlezh broadet" pe c'hoazh "poblañsoù ur rannvro bennak dezho ur sevenadur dibar"...

En tu all da c'hudenn an enbroerezh, kudann hevelebiezh Bro-C'hall an hini eo a vez aterset gant an "Afer"-se, hag e-touez ar savboentoù niverus a zo bet displeget emañ hag ahont a-zivout an "Afer", em eus renabet er gelouenn "Liberation" (adara) an nebeut komz-se digant un den anvet "Pierre Paget" (piv eo, n'ouzon dare, sindikalour, enklasker pe gelenner ? ne oa resisadenn abet a-berzh ar gelouenn) hag a zo splann-meurbet d'am meno : "Graet eo bet Istor Bro-C'hall dre zilezel yezhoù, sevenadurioù hag hengounioù. Ar re nevez erret e ranko bezañ diwar o c'houst ivez". (... "devront aussi y laisser des billes" e galleg).

Lennit al liamm

Koumanant bloaz 150 lur (studieren, tud dilabour :100 lur)

Skrivañ da : AL LIAMM
16, stradaed des Fours à Chaux
35400 - SAINT MALO -

Alamagn

DAOU VIZ



WAR-ZU AR C'HUZH-HEOL

Brasoc'h eo porzh Wannsee eget meur a borzh evit bigi dre lien e Breizh, e Berlin emañ, avat. Gant kement a liorzhoù, a lennoù, a barketer, a goadoù, n'eo ket Berlin evel ar c'herbennoù a anavezomp : 2 200 000 a dud "hepken" evit 479 km², pa z'eus 5 600 000 a dud e Pariz hag e vanlev-dostañ (350 km²). Ur gêr c'hlas-tre eo, gant kalz a "veatnikoù" ha junkoù deuet eus pep lec'h e Bro-Alamagn ar c'huzh-heol. Ar re yaouank ne vez ket dleet dezho ober o c'hoñje er gêr-se.

A-raok digoradur ar voger e teue dija ar Boloned abaoe meur a viz, da brenañ ar pezh na gavont ket en bro : postoù skinwel, kasedigoù, magnetoskopoù, dilhad, frouezh ar broioù tomm ... Deuet eo da vezañ posubl evit almaned ar sav-heol abaoe an noz etre an 9 hag an 10 a viz Du. Met ne c'hellont ket prenañ kalz. Digoradur ar Voger he deus diskennet talvoudegezh Mark ar Reter. Kevatal e oa talvoudegezh ar Mark diouzh daou du ar voger met ar feur-se ne oa ket gwirion. Cheñch a reer ur Mark eus ar c'huzh-heol evit tri mark eus ar sav-heol bremañ. Met cheñchet e vez evit pevar Mark er marc'had-du koulidkoude. Ul labour a vez graet gant almaned ar sav-heol, rak paour int.

WAR-ZU AR SAV-HEOL

An tamm disheñvel eo Berlin diouzh an tu-se : straedoù bihan 'zo, evel just, met kalz a blas 'zo, balioù ledan,

Alamagn

GOUDE DIGORADUR AR VOGER



plasennoù bras, evit an holl : ar bourmenerien, ar c'hiri-tan ivez. Neus nemet "Trabant"-où, tu 'zo dibab "break" pe get ... hag al livioù ! (Kalz a livioù 'zo !) Nebeut a girri-tan all a vez gwelet.

tremen drek, nemet ar soudarded. Na trist e oa, ar savadur istorel-mañ o chom e-unan etre ur voger ha klouedoù uhel !

AN DAZONT

Stalioù 'zo ivez, met n'eo ket posubl da gavout ur gourvarc'had rak ne nebeut a draoù disheñvel a vez gwerzhat ; marc'had-mat-tre int avat (2,80 lur ar verennad bier en ostaleri, da skwer ... met diouer a ra an tavarnioù, siwazh).

En ur zistrujañ an tamm ar voger, evel m'eo bet graet d'an 19 a viz C'wvver, ne vo ket steuziet an disheñvelerioù a zo. Posubl eo da Alamaned ar Sav-heol ober o zourist e broioù ar c'hornog met n'int ket kouviet, paeañ a reont un taos uhel e-keñver o live-bevañ.

Marc'had-mat-tre, ya, met evit an touristed eus ar broioù kapitalour : ur gelennerezh a c'houind 800 Mark ar miz e Berlin ar Reter ha 2000 Mark ar miz e Berlin ar C'hornog. N'eo ket ker ar vuhez e Bro-Alamagn ar Reter nemet evit ar c'hafed, frouezhoù ar broioù tomm, hag ar c'hiri-tan. Evit paeañ un dra blijus en tu all d'ar voger, e vez graet marc'had-du. Gar Friedrichstrasse a zo leun a dud o kinnig deoc'h da cheñch ho arc'hant.

Abalamour d'ar vouezhiadeg da zont en e vro, e-kerz an nevez-amzer, e fell da Helmut Kohl ober buan gant an adunvaniezh. Re vuan, hervez Alamaned ar sav-heol n'o deus ket c'hoant bezañ lonket, pe santañ ouzh un "diktañ". E kendalc'hioù etra ar gouarnamantoù e ro Helmut Kohl e santimant hag ar re all a serr o genoù. Peseurt raketoù a ginnigfe gouarnamant Alamagn ar Reter ? N'en deus ket arc'hant, gortoz a ra da vezañ sikouret. "N'hon eus ket tu da bouezañ war gouarnamant Bonn", a anzav ur ministr. Ar c'heloù-mañ n'en deus ket roat fiziñs en dazont da Alamaned ar sav-heol : d'oc'h hel a reont da dec'huit kuit (85 000 a dud en ur ober ur miz hanter) ha brasoc'h-brasañ e vez kudenn al lojeiz, e Berlin ar c'huzh-heol dreist-holl.

Hervez "Suddeutsche Zeitung" e rafe Helmut Kohl ar gwashañ politikerezh a zo tu da ren e-keñver Alamagn ar reter o c'hortoz e kouezhfe war bennoù he daoulin. Didalvoud a vefe evel-se ar vouezhiadeg da zont (d'an 18 a viz Meurzh) e Bro-Alamagn ar Reter, rak gounit a raio an SPD (strolladur) marteze, ha n'eo ket strollad Helmut Kohl, ar c'h"CDU" (kristen demokratel).

Abalamour d'an tizh lakaet gant Helmut Kohl en deus diskleriet Neues Forum (forom nevez) ne oa ket a-du gant an adunvaniezh-se. Bezañ a-enep dezhi o deus diskleriet ar strollad politikel a gemer perzh en "daol grenn" (en o zouez emañ ar Re C'hlas). N'ho deus ket c'hoant da vezañ staget ha bezañ beuzet, met savet ul gevredigezh sokialour wirion hep un dilabour bras, tud pinvidik-tre e-kichen tud paour evel ma gavar e Bro Alamagn ar C'hornog. Ur bihan niver a dud a soñj evelho.


Pegeit e teulo an adunvaniezh ? Hervez disoc'hioù ar mouezhiadegoù da zont e vo hini Bro Alamagn ar Reter an hini bouezusañ. Gant piv a yelo ar maout ? Gant an SPD ? Met n'eus netra arvarusoc'h eget an enklaskoù a vez graet a-raok. Evit diouganañ disoc'h ar vouezhiadeg wirion gentañ en deus ar voger-se abaoe 57 bloaz.

B.L.



AN OALED

skipailh nevez ha doareoù nevez



TREGLOU HAG E LEC'H ALL

Lec'hial brav eo AN OALED war vord an Aber, met "peñ deus pap lec'h" eo ivez. Setu perak eo bet soñjet sevel ar bloaz-mañ ur roudad stajoù bihan e pep lec'h. Degemeret mat eo ar menozh war a seblant. Tud a ve er stajoù "gouren" e Berrien pe "Labourat al Liorzh" e Parroz Gireg, Fellout a ra d'ar skipailh mont c'hoazh pelloc'h war an dachenn-se met o kinnig ar stajoù en un doare disheñvel hag o klask kentoc'h kenaozañ stajoù gant tud pe gevredigezhioù diazezet dija war al lec'h-staj. Evel-se e vo kont gant ur staj marc'hegan kenaozet gant AR VARC'HEKADENN pe un dibenn-sizhun naetaat hentoù ha steroù e Ploneour menez gant AVEL AR MENEZ.

BEZAÑ EFEDUSOC'H

Kemmañ a ra an doareoù-ober. Da heul ar gasadenn "1500 katalog" a zo bet graet e oar an dud pell a-raok peseurt staj e vo ha pebare. Kalz a vugale a zo enskrivet evit vakañsoù Pask hag ivez kalzig evit lod kreizdennoù hañv. Nag a blijadur eo labourat evit-se pe oa dav gwechall gortoz ar mare diwezhañ a-raok gouzout ober, pe nullañ ur staj pe derc'hel dezhañ.

HAG AN DAZONT ?

Dre ma vez darempredet al lec'h e teu tud warnañ. Dre ma z'eo bet embannet listenn ar stajoù ez eus diwanet kinnigoù all e-touez mignoned AN OALED ha mignoned ar brezhoneg : ober bara e Rieg/Belon (29), keinañ levrioù, broderezh, naetaat hentoù.

Aes eo lakaat stajoù war sav. Met siwazh kalz diaesoc'h eo asuriñ e vo deus outo e gwirionez. Aze e welomp sklaer penaos ne raio ket skipailh AN OALED war-dro reiñ lañs d'ar brezhoneg ha reiñ dudi d'ar vrezhonegerien e-unan. Dav vo dezhañ kaout sikour.

Y.F.J.

1 Tu 'zo da gaout skouerennoù c'hoazh en ur skrivañ d'AN OALED.

2 Dalc'het e vo unan adarre ar bloaz-mañ etre ar 14 hag ar 25 a viz Eost 90.

BEZAÑ DIGOR

Abaoe an hañv en deus klasket ar skipailh skoulmañ darempredoù liessurt ha diwar an dra-se e vez gwelet bremañ tud o tont d'AN OALED a bep korn a Vreizh hag a vro C'hall (Dijon, Marseille ... evit ur staj aikibudo) hag a bep seurt menozioù ganto (aikibudo, lazou kanañ, klub rederien a varc'h-houarn, OGT ... ar Re O'hlas evit Breizh). Bewec'h e vez skignet traktoù ha displeget palioù hol labour. Dre-se e vo gounezet (arc'hant !) dre ma anavezot an dud hon emzalc'h.

LABOUR A CHOM D'OVER

Ma z'eo AN OALED un ti peurgempenn evit resev strolladoù e vank c'hoazh a-bep seurt traoù evit aesaat buhez ha plijadur an holl stajidi : gwelaoù dereat, marc'h-houarn VTT ha kayakoù a vo poret ar bloaz-mañ evit ma c'helle ar stajidi mont d'ober un droiad war an Aber Benead etre div gentel.

Labourioù brasoc'h eo ret deomp ober c'hoazh e-keñver broderezh ha kelaouiñ, ha digor eo ar greizenn d'ar skolioù (klasoù natur ha sevenadur). Hag evit-se e vo dav d'an animatourien bezañ stummet.

An darn vrasañ ac'hanoc'h o deus bet tro da lenn "Katalog stajoù AN OALED" bet skignet n'eus ket pell 'zo(1), warnañ un 50 staj bennak e brezhoneg pe zoken e galleg diwar-benn sevenadur Breizh. Traoù nevez e-leizh ... Perak ha penaos ?

Anavezet e oa AN OALED evit e stajoù brezhonek dalc'het da vare ar vakañsoù(2). Unan ouzhpenn a zo bet graet e miz Eost 89. E emvod fin ar staj eo bet lakaet sklaer gant an holl e oant bet holl plijet dreist gant "roll-labour" ar sul. Ha petra oa an deiz-se ? Sevel un tamm diwezhatoc'h, mont asamblez war draezhenn Trempant, mont en dour, pik-nikañ, c'hoari volley hag ober un droiad kano-e-kayak evit ar re a blijed dezho. Kalz a vad en deus graet seurt devozh d'an holl : darempredoù ha plijadur da vezañ asamblez. Abaoe en deus soñjet skipailh AN OALED lakaat ar pouez war seurt stajoù : ar brezhoneg hag an dudi, ar brezhoneg hag an deskid teknikoù.

Dre e stajoù e rank respont AN OALED d'ur goulnenn a-bouez evit an dazont : perak ha penaos reiñ c'hoant d'an dud deskid brezhoneg er bioavezhioù dazont ?

Seul aesoc'h e vez deskid ur yezh pa ouziz petra emaoch o klask bevañ.

AN OALED

STAJOU

17-18 a viz Meurzh :

Staj kan : Kanaouennoù da zañsal eus Breizh Uhel, Breizh Izel (Goueled-Leon dreist-holl). Dasket e vo d'an dud dañsal mar deo ret. Ur fest-noz a vo d'ar Sadorn noz en Oaled. Priz : 300 lur en holl, e brezhoneg, evit tud etre 7 ha 77 bloaz.

Staj deskid fardañ kouign amann ha kombot.

Staj kembraeg : kentelioù kembraeg war 3 live, 9

eurvezh kentelioù : yezhadur, poelladennoù, c'hoarioù. E brezhoneg hag e galleg, evit tud ouzhpenn 15 bloaz, 300 lur.

Fest-noz d'ar Sadorn 17 adalek 9e gant Trouzerion Mod Koh.

24 ha 25 a viz Meurzh :

Staj c'hoarielloù-koad. Deskid sevel ur c'harr-samm, un tren, ur gornigell, pe ur marc'h-brañsell ! Reiñ muioc'h d'ar

vugale dre ar c'hoarielloù. 300 lur, e galleg, ouzhpenn 15 bloaz.

Staj yoga : Un dibenn-sizhun evit an em adkavout gant e gorf. Yoga Marpa, Milarepa ha dorloerezh korean. E brezhoneg, ouzhpenn 15 bloaz, 300 lur.

Eus ar 26 betek an 30 a viz Meurzh :

5 devezh evit anavezout gwelloc'h sevenadur Breizh. (E galleg, "Identité Culturelle et Communication" aozet gant un UBAPAR).

SKRITELLAOUÏN

Fardañ skritelloù a vo desket ober e Treglonoù gant J.P. Mellouet ha F. An Henaff, eus an 28 a viz Ebrel d'an 1 a viz Mae e Treglonoù, gant an Oaled evit just.

AN OALED, Kreizenn Sevenadur Vrezhonek, 14 straed an Ti-Kêr, 29870 TREGLONOÙ, Peilgomz 98 04 07 04.

DEVEZH-STUDI

D'ar Sul 25 a viz Meurzh e vo aozet un devezh-studi gant Re C'hlas Breizh en Oriant, diwar-benn "Breizh, hec'h istor, he fersonalezh, he dazont".

E-touez ar brezegenerien e vo Loeiz Ar Beg (bet skrivet gantañ "Les bretons et leurs libertés"), a gomzo eus istor ar vro, eus efedoù dispac'h 1789 hag an trevadennerezh gall war Vreizh hiziv ; Per Denez a gomzo eus politikerezh yezhel ar stad c'hall ; ha Michel Philipponeau a gomzo eus an "emsavioù politikel" ha kevredigezhel e Breizh abaoe ar brezel diwezhañ", eus digreizennañ ha rannvroelañ, hag eus "emsavadurioù dazont Pobl Vreizh".

20 lur an devezh-studi (60 gant ho merenn ma roit hoc'h anv da Norbert Fournier, 1 straed Gwalen/Audierne, 29200 BREST, peilgomz 98 42 07 87) a vo dalc'het en FUT/Oaled al Labourerien Yaouank, straed an amiral Courbet, en Oriant.

MARC'HEGAN

A vo graet dre Vro Leon gant brezhonegerien eus ar Merc'her 11 a viz Ebrel da vintin betek ar Sadorn 14 goude merenn, dindan renerazh Yann Brekilien. Goulnennet e vez digant ar varc'hegeien komran mat brezhoneg, bezañ a-live gant ar "Sileug Arant", ha resisaat en-araok hag añ e teuint gant o marc'h pe hag añ a rankor feurmiñ unan evito, 500 lur e kousto, 1000 lur gant ur marc'h ouzhpenn. Skrivañ da Yann Brakilien, 38 straed Janed Ark, 29000 KEMPER.

AL LEUR NEVEZ

Staj brezhoneg a vo e Kemper da vare Gouelioù Kerne eus al Lun 16 a viz Gouere da 9 eur betek ar Gwener 20 da 5 eur, gant "Al Leur Nevez" hag "Ar Skol Vrezhoneg". Skrivañ da Al Leur Nevez, 38 hent Lagatu, 29000 KEMPER.





UR STAJ "BLEIMOR" E KISTINID

Ur sizhunvezh-emstummañ aozet gant "KUMUNIEZH BLEIMOR" a vo kinniget d'ar Vretoned yaouank (paotred ha merc'hed) eus al Lun 16 a viz Ebrel da 14 eur betek ar Sadorn 21 en endervezh. Dalc'het e vo e ti parrez Kistinid (e Bro-Wened).

Prezegenoù diwar-benn amzer dremenet ar Geltaed, Istor Breizh, labour ar Sent kozh a Vreizh hag a lwerzhon e Broioù Kornog Europa, Broc'heliann ha lennegezh an Daol Grenn, ar sonerezh, al lec'havadurezh, an arz keltiek (gant labourioù dorn) hag all, a vezo graet gant arbennigourion eus ar re welian.

Kentelioù brezhoneg disheñvel a vo graet bemdez evit ar re damziesek o kregin gant studi ar yezh hag evit ar vrezhonegerien desket o defe c'hoant en em varrekaat.

Bemdez e vo un eurvezh forom da reiñ tro da bep hini breutaat diwar-benn kudennoù a-bouez o tennañ da vuhez Breizh hag ar Vretoned.

Evel just, un darn eus an amzer a vo roet d'ar c'hentelioù koroll ha kan. Beilhadegoù breizhak a vo graet bemnoz diwar-benn an hengoun keltiek pe pajennoù-zo eus Istor hor Bro.

Priz ar sizhunvezh a zo bet divizet evit d'ar c'hentelioù kont eus yalc'h ur studier yaouank (250 lur en holl).

Evit lakaat hoc'h anv, ret eo skrivañ, kent ar 25 a viz Meurzh, d'an Ao. P.Keraod, 32 kae Sant Cyr, 35000 ROAZHON.

BEP DAOU VIZ LENNIT

AL LANV

59 hent Kerdronioù Vihan
29000 Kemper

Koumanant bloaz : 100 lur
Skoazell adalek 130 lur

KEMENNADENNOU



KELC'H KELTIEK ROAZHON

Deskiñ seniñ daou-ha-daou :

D'ar 7 hag 8 e viz Ebrel 1990, gant Youenn Bilhan, Christian Annelix ha Thierry Lahale, e ti-feurm La Happe, Keryann, Roazhon. Sonerezh Bro-Wened Breizh-Uhel an hini a vo studiet. Skrivañ da F.Garraeu, 6 allée de la Source/Alez an Eneleann, 35590 L'HERMITAGE/AR PENITI

FEST-NOZ E PEDERNEG (22) D'AN 31 A VIZ MEURZH

Gant Strobiniell, Bernard Lasbleiz, Moal-Peron, Kastell-Galopin, An Intañv-Robin-Sulgnard.

Aozet gant : kevredad Aodoù Arvor Unvaniezh ar Gelennerien Brezhoneg.



Ma hoc'h eus c'hoant da gaout keleier diwar-benn hon binvidikañ strollad "rock" n'eo ket e-barzh "Musique Bretonne" e kavoc'h anezho, e-barzh kannadig ar strollad ne laran ket. Evit e resev e c'hallit skrivañ da E.V., 33 straed Loren/Lorraine, 44000 NAONED. Skritelloù, badjoù, kartennoù hag all a c'haller goullenn war ar mintel ivez 3614 CHEZ.EV.

KELEIER BODADEG AR FAMILHOU KRISTEN

E Rostren adalek 12 eur e skolaj Kampostal d'ar Sul 8 a viz Ebrel. Merenn "e ti Mari C'hlaizhoù" (piknik). Goude se e vo ur boumenadennig ma vez brav an amzer. Ur brezegennig da 15h30. Ar vugale o devo diduamantoù. Hag an olerenn e diwezh an emvod da 17 eur e chapel Kampostal.

KAMP KATEKIZ AR VUGALE

E Rostren eus al Lun 6 betek ar Sadorn 11 a viz Eost.

Degemeret e vo vugale etre 7 ha 14 bloaz, brezhonegerien hepken, barrtek da gomz ar yezh e pep degouezh. Rak e brezhoneg penn-da-benn e vo ar c'hamp. Gallout a ra ar gentek kas d'ja anvioù o bugale o dije c'hoant kemer perzh. C'hoarvezout a raio d'an hevelep mare hag ur c'hamp brezhonek all gant Gated Diwan e Treglonoù, siwazh, met n'eus ket bet tu da ingaliñ gwelloc'h. Da vloaz e vo dav en em glevout gwelloc'h en a-raok.

FEST-DEIZ A ZO

D'ar sul 25 a viz Meurzh e Kreizenn "Roparz Hemon" adalek 14e30 gant Nif ar Floch, Sabine Koadout, Yann-Fañch Kemener, Marsel Gwilhoù, Rene Cras, Jilberzh Filip.

Kafe, krampouezh, HA PLIJADUR A VO !

Kreizenn Roparz Hemon, plasenn Verdun, 22200 Gwangamp.

PEDERNEG
(Bro Dreger)
Sadorn 31 a viz meurzh
FEST-NOZ
BRAS

Strobiniell
Bernard Lasbleiz Moal-Peron
Lutauf-Robin Kastell-Galopin



BUHEZ PEMDEZIEK DISKLERIADUR-TAILHOU

Warlenn e oa bet tu da gaout digrask war an tailhoù da baeañ pa vaneged an arc'hant roet d'an dud war ar renk er votadegoù. Ar bloaz-mañ e vo digrask gant ar skodennoù roet d'ar sindikadoù. Siwazh n'eus sindikad breizhak ebet c'hoazh (daoust da strivoù Emgann a-hervez).

Chom a ra an distaol diwar ar profoù roet d'ar c'hvedredigezhioù : meneget e vez ar profoù d'an aozadurioù a zifenn ar galleg, yezh nemet ar Stad C'hall evel a ouzomp. Ur skwer all a zroukflorc'heredh yezhel, ha klevet e vo hon holl dilennidi o klemm a-bouez-penn, neketa ?

Ar profoù d'an aozadurioù brezhonek a c'haller lakaat war gont an "aozadurioù sevenadurel" pe "deskadurezhel" mames tra, reiñ a reont distaol a 40% eus ar profadoù diwar an tailhoù da baeañ. Ret eo koulskoude kas papieroù-tenstenoù a-gavret gant ho follenn-diskleriadur. Seurt papieroù, mat eo deoc'h gouzout, a vez roet gant DIWAN, AN OALED (anavezet mat) pe BREZHONEG OFISIEL (43 straed Lebourg, 35000 Roazhon) ha marteze kevredigezhioù all diskleriet hervez lezenn c'hoazh. Setu pa gredit reiñ 100 lur ne roit nemet 80 lur d'ar brezhoneg hag e lennit 40 digant ar stad. Perak ne glasket'ch ket tannañ muioc'h c'hoazh ?

Yann an Arc'hanteg

BARZHONEG EVIT BRO-DURKIA

"Setu amañ da heul ur barzhoneg. Kas a ris anezhañ da "Amnesty International" mat larat o deus ha ne vije ket posubl hen embann e brezhoneg. Pouezus eo evelato hag e vez skrivet e brezhoneg, peogwir komz a ran diwar ur vro ma'chet dre implijout ur yezh ma'chet kerkoulz."

Dedi ar barzhoneg :

hepsi cazaevdiki Türkleri
(ve ölüleri) yúzünden çabaya
zülüm karşonlarini ve ilisklere
ki bimlek degiller eger ogullarolar
ve kizlaronlar gery oçyacyagklar.

Evit kementi Turkad a zo e-barzh an toull-bac'h o stourm a-enep ar marc'herezh. Hag evit o zud ne ouzont ket hag-eñ e teuy en-dro o mbien hag o merched

Troadigezh a zo 'barzh ar barzhoneg :

1. "Mont a ra mat, Aotrou ?
Mont a ra, trugarez, ha ganeoc'h ?"
2. "Komz ouzhin, lastez gast ! Penn-gwiz !"
3. "Arsavit, mar plij ! Me ho ped, Aotrou.
Arsavit ; mar plij"

"Nasiliniz effendim ?
"Ben iyilim, tesekkür ederim,
Ve siz ?"

Sed ar gerioù kentañ
A zeskiñ en ho yezh,
Ken nobl ha ken kozh ;
C'hwiek hag eson he mentadurioù.
Touz a ra he gerioù war an teod
Evel un tammig loukoum dous.

Met lazhet e vez ganeoc'h, neoazh.
O vervel emañ-hi etre muzelioù
An Durked 'zo bet brondiet ganeoc'h ;
En ho toull-bac'h et vezont lazhet
Lazhet 'n o c'horf hag 'n o spered
Ar re yaouank, ar re gozh ;
Ar marc'her, ar baotred ...

"Pis fahise ! Bana açikça söyle, domüz !"
Goude an holl eurvezhoù-se
Tremenet gantañ en he zoull-kambur,
Kouzhañ a ra e c'herioù 'n he divskouarn
Ken poanuis ha taolioù e benn-bazh
O tiskenn hag adiskenn
War sol he zroad glas.

"Durdurun, lüften ! Sızden dilenyorum,
effendim, lüften, durdurun, lüften ..."

Sed ar gerioù kentañ
A zeskiñ-me en ho yezh, neuz ;
Ur yezh ken c'hwiek evidon-me.
Ha sed ar youch a vez eurc'het
Gant re a Durked
En ur yezh aet da vezañ gouez.

Robert BAXTER

AN DUCHENN HUD
BECHEREL

KAFEDI-TI KRAMPUEZH
ABADENNOÙ-NOZ
A-BEP SEURT

Etne ROAZHON ha DINAN (ul lec'h
plijus degemer e brezhoneg, da 25
mn eus Roazhon) da 25

KEMENNADENNOU



LEVRIOU

"Tout lu - Tout cru 1989"

Evit an trade gwech e teu er-maez al levrig-se a ro un dibab eus al levrioù gallek nevez deuet er-maez evit ar vugale etre miz Here 1988 ha miz Gwengolo 1989. Embannet eo gant "Levraoueg-Kêr Roazhon" hag an holl levrioù meneget a gaver e levraouegoù-kêr.

Evel er bloavezhioù kent, hag a-drugarez da Olier ar Mogn, e kaver ivez un dibab brav a levrioù brezhonek, kinniget e brezhonek hag e galleg.

Golo al levrig avat a zo unyezhek evel boaz.

BARZHONEGAÑ

Evit an trade bloavezh e kinnig gouelioù kêr Roazhon ("Les Tombées de la Nuit") d'ar varzhed divud an tu da lakaat lenn o oberennoù gant ur bodad-barn. E 1990 e vo rat skrivañ diwar-benn "Ar Vaouez hag an Noz". Eus 3 da 5 barzhoneg a c'hallit kinnig (hep mont dreist 100 linenn), gant hoc'h anv, chomlec'h, niverenn bellgomz ha oad, ha kement-se a-raok an 31 a viz Mae da : "Tombées de la Nuit-Poésie, Ti an Douristed, 8 leurenn ar Maréchal Juin".

Ar skridoù dibabet a vo lennet bemdez dirak selaoerien e-pad ar gouelioù (eus an 30 a viz Mezheven betek ar 7 a viz Gouere). Evit ur wech e vefe mat kas barzhonegoù brezhonek !

SKINGOMZ

RADIO BRO-GWENED

2 eurid brezhoneg a vez war Radio Bro-Gwened, (97 MHz, 88 MHz e kêr Pondi) etre 10e30 ha 12e30, ag al Lun d'ar Gwener, kaset en-dro gant Monig ar Boulic'h, ur vrezhonegerez a-vihan ag an Ignel, gant sikour François Louis ha Jean-Pierre Deredel.

Pennadoù-kaoz mesk-divesk, atersadennoù, doareoù ag ar vro ha c'hoarioù a vez. Plijadur bras ivez.

RADIO-BRO RADIO AR VREIZHIZ E PARIZ 88.2 MHZ

Program miz Meurzh 1990 d'ar gwener da noz.

8e-Kinnigadur program an abardaevrezh ha sonerezh. 8e30 Pennad-stur gant Serj. 8e35 Keleier (brezhoneg ha galleg) displeget gant Mai ha Serj. 9e Mesk-divesk (keleier sevenadurel, festoù-noz, c'hoarioù...) 9e45 E-pad ur c'harder ez eus tu da gas kemennadennoù da Jilbert Kabon (toulbanchet e Fresnes) dre hanterouriezh Radio-Bro. 10e "Breizh Hiziv", magazin (d'an 9/03 : "Mojenn an Ankar", ur studiaden diwar-benn Anatol Ar Braz gant Dominig, d'ar 16/03 : Magazin ar brezhoneg gant Serj Richard, d'an 23/03 : Ekonomiezh gant Yann Fievet, d'an 30/03 : n'eo ket bet kavet evit choazh danvez an abadennoù). 11e Sonerezh pe gonc'hennoù (d'an 9/03 : abadennoù sonerezh kaset en-dro gant skipailh Radio-Bro, d'ar 16/03 : pempvet lodenn "Marion ar Faouet" gant Gwendal ar Floc'h, d'an 23/03 : abadennoù sonerezh kaset en-dro gant skipailh Radio-Bro, d'an 30/03 : kaha-diskan gant Maoris Poulmarc'h, Tien, Serj hag all).

RADIO-BRO 88.9 MHZ (BRO PARIZ)

Boest post 639 75367 Pariz cedex 08 pellgomz 47610075

TOULL-KUZH

SKINWEL



Cheñchet eo eurioù an abadennoù brezhonek er skinwel. Div abadennoù a vo d'ar Sul hiviziken. Un abadennoù daou ugent munutenn etre 12.05 ha 12.45 gant An Taol-Lagad, keleier ar sizhun. Un eil abadennoù a vo un tammig diwezhatoc'h etre 13.30 ha 14.30. An div abadennoù Chadenn ar Vro a vo skignet war Vreizh a-bezh.

Dek munutenn ouzhpenn a abadennoù brezhonek a vezo pep sizhun eta. Gwir eo e vo diaes d'ar sellerien adkavet penn o neudenn gant ar cheñchamantoù a zo bet nevez 'zo. Pa 'z eus eurioù-skignañ a-zoare bremañ e c'heller esperout e vint dalc'het ouzhpenn miz !

E Bro-Skos eo penn ar vazh a zo bet cheñchet gant ar skinwel gouezelek. Ur chadenn tele gouezelek a vo savet ar bloaz-mañ. 12 milion a lurioù saoz a vo roet d'an tele gouezelek diwezhatoc'h evit produñ 20 eurvezh abadennoù ar sizhun. Peadra da hufiret ... Dreist-holl pa ouzer n'eus ket pevar ugent mil den o komz gouezelek. Pemp gwech bihanoc'h o niver eget niver ar vrezhonegerien.

Demokratiezh ar Saozon n'eo ket demokratiezh ar C'hallaoued ha pennegezh dilennid Bro-Skos n'eo ket pennegezh dilennid Breizh. Gwir eo ivez ne c'heller ket keñveriañ spered broadel ar skoziz saoznegere pe gouezeleger gant hini ar Vretoned gallegere ... pe brezhoneger.

Y.P.

yezh

LABOUR

Emañ ar gevredigezh TREIN o klask troourien (e brezhoneg ha diwar brezhoneg) prest da labourat ent-roliek koulz ha diwar zifrae. Goproù devazhourien pe eurvezhourien zoken.

Roit hoc'h anv pe goullennit titouroù digant :

Trein
4 str ar Rouergue
29200 BREST.



DIWAN

NOZVEZH

AFRIKA DU - BREIZH

D'ar Gwener 6 a viz Ebrel adalek 7e30, e TI karter Keryann (Maison de quartier Villejean).

Kenaozet gant ar c'hvredigezhioù "Bretagne-Côte d'Ivoire" ha "Skozell Diwan Roazhon".

Pred yen - tañvaet e vo bouad Afrika Du.


Kaset e vo an nozvezh en-dro gant dansoù ha sonerezh Afrika ha Breizh.

Tikejoù e gwerzh e Coop Breizh, streaed Penhoët, Roazhon.

EMAN DIWAN O KLASK

- Brezhonegerien, Efedus, Startijenn ganto
 - 1 Troour galleg/brezhoneg
 - Skolaerien (gopr skeul D.S.)
 - Danvez-Skolaerien (stummadur gopret)
 - Implijidi Burev (Contrat Emploi Solidarité)
- Kas ul lizher hag ur C.V. da DIWAN - Servij Implijidi B.P. 22 - 29870 LANNILIZ

gerioù-kroaz miz Meurzh




A-LEB

- Lakaat da gonz yezh Shakespeare
- Lakaat-plouz - Ar vaouez kentañ
- Sec'hedek - Din-me - Diouz ar c'hiz saoz.
- Fellout a ra dezhe cheñch an traoù.
- Frouezhenn vihan.
- Ses Kabourintin.
- Ur miz - E-barzh - Stagañ a ra.
- Ger-nac'h - Raganv-gour.
- En o c'hreiz - Menned deñved.
- Dreist-foñvor - Evit soañ lien - Raganv-gour.

A-SERZH

- Ur vocet torr-penn, eac maam-gozh.
- Taol saer - Ger-nac'h.
- Frouezhenn-druz.
- Mema - Enkrez.
- Pegon ! - Mema.
- Gwalennoù evit diwall ar bin-vioù.
- Kouezh ha staeñ - Rakger.
- Eus mont - Dindan an espenn.
- Diagoned.
- Gwez - Dreist-foñvor - D'ul lec'h bemak.

gerioù-kroaz miz C'hwevrer 90



BREMAN 102 MIZ MEURZH 1990

TAOLENN

LIZHIRI	2
KEMENNADENNOU	2
MANIFESTADEG ROAZHON	3
NIVERIDIGEZH 1990	4
KELEIER BREIZH	5
KELEIER	6
KELENN	7
KEMBRE	8
IWERZHON	9
BROADOU HEP STAD	10
BROADOU HEP STAD	11
MOGER BERLIN	12
HA BREMAN ?	13
AN OALED	14
STUMM NEVEZ	15
STAJOU	15
KEMENNADENNOU	16
BARZHONEG	17
TAILLOU	17
KEMENNADENNOU	18
GERIOÙ-KROAZ	19
KINNIGOÙ LABOUR	19
FEST NOZ VRAS	20

Ar pennadoù gant Yann Les-Kildri, Iwan Kadored, Ki Mouc'h Kembre, Alan Penneg, Mark Kerrain, Skol an Emsav Y.F.Jacq, Emgann, Alan Martel, Pierre Kerlorc'h, Diwan, Yann Arc'hanteg, Robert Baxter, Tangi ar Bleiz, T.L E.Riou, Fulup ar C'hordroch Alan Martel.

Maketenn gant Nolwenn Louarn, Jean Michel Roynard, Lena Louarn.

Tresadennoù gant Malo Louarn.

Luc'hskeudennoù gant Lena Louarn - Kazetenn eus Kembre -

RENER BREMAN Mikael Baudu
KOUANANT 150 lur/bloaz ha 200 lur (estren). Skrivañ da vBREMAN 8 ru Hoche 35000 ROAZHON - Pellg:99-38.75.83

EVIT NIVERENN MIZ EBREL :
Kasit ho keleier, kemennadennoù, pennadoù, luc'hskeudennoù a-raok ar 1añ a viz EBREL ! trugarez !!

FEST NOZ VRAS

a viz

Sadorn

17

Meurzh

gant ar

SONERIEN



DU

sal ar Site



ha kanerien ha sonerien
BREIZH

e ROAZHON

aozet gant
Dazont/Skol an Emsav